


AL 9 LUR . NIV 17 LANIV HERE 82



PENNAD STUR

Nann ! Ne c'hello morse ur politikerezh rannvroelour bezañ bastus da ezhommou ar Vretoned ! Bemdez e teu anatoc'h deomp penaos eo strizh an diforc'h etre jakobined an tu dehou dec'h ha reoù an tu kleiz hiziv. Galloud Pariz a glasko atav ober ur politikerezh broadel gall a ya a-enep da splet-ou Breizh. Ur wech ouzhpenn e weler an touell eo an dileuridi vreizhek c'hall hag a-gleiz e vefent. Daoust d'ar pezh a gred da loç marteze n'eus ket tu da lakaat ar strolladoù gall d'ober ur politikerezh breizhek, digareziou politikel eo izili politikel breizhgar ar strolladoù gall ha tra ken. Bezañ gall ha breizhat war un dro a zo bezañ a-enep breizhat !

Ouzhpenn bezañ gall en em c'houlenn a c'heller ha sokialour eo e gwirionez ar P.S. Pa laosker an dud gopret ar fallañ da gaout ar spi e vo kresket o faeoù ha pa greder lavarout dezho nann goude, an dra-se n'eo ket sevel a-du gant ar sokialouriezh. Pa vezer di-c'houest koulz er mererezh hag er rannoù nevez-broadelaet da reiñ ar gomz d'ar vicherourien, da zisteurel yev pounner reolennoù an urzhaz, da blaenaaat liveoù ar goprou, an dra-se n'eo ket sokialouriezh ! Pa vezer diouzh un tu o reiñ mel d'ar batromed vihan, krourien labourioù ha korvoerien touet an darn vrasañ anezho, ha diouzh un tu all reiñ pour d'an embregerezhioù stadelaet "keflusker an ekonomiezh", an dra-se n'eo ket sokialouriezh ! Ar sokialouriezh a zle kregiñ gant perc'henniezh boutin ar benvegoù produiñ n'eo ket gant ar Stad mes gant ar vicherourien, ar sokialouriezh ne zle ket bezañ diazezet war reolennoù disbersonel gwasker ar mererezh, ar sokialouriezh a zle reiñ an tu leun d'ar vicherourien d'en em aozañ en o c'henstaliou e-giz ma fell dezho, ar sokialouriezh ne zle ket kreizennañ ar c'hevala hogen e zaspazhañ e-

touesk ar vicherourien ne vint ket mui binviji produiñ hogen krourien o labour. Ar sokialouriezh a zinac'h galloud ar gevalaourien war ar re a wask koulz ha galloud ar mererezh reizhkredennek war ar re a wask ! N'hon eus e Breizh nerzh sokialour ebet o pennadiñ hent war-zu ar frankiz, n'eo ket o vont da heul ar strolladoù gall m'e gavint !

TAOLENN AL LANV

- | | |
|------------------|------------------|
| 3. EUSKADI | Patrig An Habask |
| 4. KORSIKA | Per Denez |
| 7. IWERZHON | Herle Denez |
| 11. MOR | Gwendal Denez |
| 12. KEMBRE | John Idris |
| 14. BREIZH | Y.V. An Haridon |
| 16. ENERGIEZH | Andreiv Goalig |
| 23. LENNEGEZH | Herle Denez |
| 30. LABOUSED | Tudu |
| 31. GERIOU-KROAZ | Job |
| 32. BANN-TRESET | Tudu |

FOTO AR GOLO A ZO BET GRAET GANT DANIEL AN DOUJET.

AL LANV CPPAP 62602 ISSN 0246-5396
Kelaouenn diskleriet hervez lezenn.
Rener : Patrig an Habask
Ti-moulañ : du marin Ar GELVENEK
AL LANV, 8 straed Enez-Vaz,
Ar Bradeñn, 29000 KEMPER
HERE 1982
KOUMANANTOU : 50 pe 80 lur

EUSKADI

Chomet eo a-sav al labourioù war an dachenn "dibabet" da sevel ur greizenn nukleel e Bro-Euskadi abaoe an 22 a viz Mae. Da heul an dra-se en deus divizet ar gouarnamant spagnat d'ar 27 a viz Eost krouiñ ur gevredigezh daoubennek, renet gant ar Stad ha prevez war-un-dro da gas da benn ar chanter. "Ne c'hell ket ar Stad plegañ ouzh nerzhioù ar sponterien" a lavar ar ministr Bayou.

Evit ETA Militar eo Lemoniz arouez stourm ur bobl. Kenderc'hel a raint da dagañ ar benvegoù evel an ijinourien a labour war ar greizenn. Goude lazhañ ar penn-ijinour Jose Mari Ryan e kendalc'hint da dagañ an dud e penn ar chanter. Atav gouez da ETA M e vefe ar greizenn-se e Lemoniz un arm a-zoare evit faskourien Bro-Spagn. "Petra a virfe outo da lakaat da darzhañ ar greizenn da echuiñ gant ar gudenn eus-karek ?" emezo



LEMONIZ

Evito c'hoazh, ma adkrog al labourioù ha pa vefe dindan gward an arme ijinourien estren (re ar vro a nac'h derc'hel da labourat eno) e padfent tri bloavezh da nebeutañ. Met ne vefe ket tu da lakaat archerien ouzh troad kement peul kas tredan a zo. Setu ne vo morse tu evito da zerc'hel ur greizenn evel-se da vont. Chom a ra da welet hag-eñ e talc'ho ken tart ar gouarnamant sokialour hag e ziaraogad d'ur raktres en deus dija koustet ken ker ...

DIVODADUR ETA PM VIIvet BODADEG

D'an 30 a viz Gwengolo e tisplege 10 den bet kargoù gante en ETA PM en un emvod foran dirak ar gazetennerien e Biarritz e oa divodet ETA PM VIIvet bodadeg. Dont a ra an divodadur-se da heul divizoù etre kannad Euskadiko Eskerra ha maodiern diabarzh ar Stad spagnat, Roson. Gouarnamant Bro-Spagn en deus dieubet dek prizoniad eus ETA PM ha roet 12 aotre-tremen-harzoù d'ar re o doa kavet repu e Bro-C'hall. En holl ne vefe nemet un 20 stourmer bennak eus ETA PM o dije dilezet ar stourm armet. En o c'hendalc'h e miz C'hwevrer 1982 ne oa aet nemet 25 % eus ar mouezhioù gant ar re a felle dezho dilezel ar stourm armet. Ar re all o deus kemeret anv ETA PM Svet bodadeg hag o deus lavaret e kendalc'hent gant ar stourm armet.

MOUEZHIADegoU E BRO-SPAGN

Un trec'h bras evit ar P.S.O.E. (Strollad Sokialour Micherour Spagnat) eo bet ar mouezhiadegoù-mañ. Kaset eo bet kuit an U.C.D., ar strollad "kreizour" a rene war Bro-Spagn abaoe pemp bloaz. E Bro-Euskadi ez eus bet dilennet ur c'hannad broadelour mirour ouzhpenn evit ar P.N.V. (Strollad Broadelour Euskadi) tra ma kolle Herri Batasuna (Kostezenn bolitikel ETA M) ur sez evit mirout 2. Ar P.C. spagnat eo ar strollad a goll ar miñañ. Kavet o deus gwel ar Spagnolez eta votif evit ur c'henn plaen ha digomunour diouzh un tu ha diouzh un tu all mont da grefivaat an tu dehou, an Alianza Popular. En niverenn a zeu e vo gwelet ar cheñchamantoù politikel degaset e Bro-Euskadi, Bro-Gatalonia ha Bro-Spagn gant dilennidigezh ur gouarnamant kempennelour sokialour e penn ar vro.

ER SENED

	1979	1982
- P.S.O.E.	65	134
- A.P.	2	54
- U.C.D.	120	4
- P.N.V.	8	7
- Reoù all	13	9
En holl	208	208

AR PARLAMENT NEVEZ 350 KANNAD ENNAN

Strolladoù	1979	1982
- P.S.O.E.	121	201
- Alianza Popular	9	105
- U.C.D.	168	11
- C.I.U. (Broadelourien gatalan)	8	12
- P.N.V. (Broadelourien euskarek)	7	8
- P.C.E.	23	5
- U.C.D. A.P. Euskadi		2
- C.D.S.		2
- HERRI BATAUNA (Broadelourien euskarek)	3	2
- EUSKADIKO ESKERRA (Sokialourien euskarek)		1
- E.R.C. (tu kleiz katalan)		1
- P.S.A. (strollad sokialour Andalouzia)	5	
- Reoù all	6	

Patrig an Habask

SKRID

DANEVELLOU-BARZHONEGOU TROIDIGZHIGU

RENER : GWENDAL DENEZ

KOUMANANT EVIT 4 NIVERENNA :
40 LUR DA BER DENEZ
AR R. FLOARE,
29100 DOURNENEZ

BREMAN

BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN

KAZETENN AR STOURMOU E BREIZH. BEP
DAOU VIZ E TEU ER-MAEZ KELEIER AES
HA BEV DIWAR-BENN BUHEZ AR VRO.
KOUMANANT : 50 LUR. 8 STRAED HOUCHE
35 000 ROAZHON. (SKOL AN EMSAV)

KORSIKA

Er bloaz-mañ, e Kopenhagen, da geñver ur c'hendalc'h azoet e salioù ar Parلمان, gant *Det Danske Selskab*, em eus gwelot en-dro ma c'heneil Lucien FELLI, Korsikad, stourmer eus an U.P.C., nevez anvet e Kuzul Rannvro Korsika. Tri bloaz a-raok e oa deut dija da Copenhagen a-gevret gant Edmond SIMEONI, hag azoet em boa evito un "interview" e skinwel Bro-Danmark. Reuz a oa bet, ma Doue ! e kannadti Bro-C'hall. Hag ar Flandrez-adez bet jubennourez evit an abadenn he doa bet ur weladenn bennak digant ar "servijoù" gall. Er bloaz-mañ, ez eus deut un den eus kannadti Bro-C'hall da saludiñ FELLI : ma vije bet ur c'hannad gall e Bro-Danmark d'ar mare-se, e vije bet emichañs pedet da evañ ur banne ! Kemm a ra an traoù. War an tu mat, evit ur wech.

Un diviz am eus bet gant L. FELLI evit lennerien AL LANV. Hag un nebeut dihelloc am eus bet digantañ ivez. Diwar kement-se em eus tennet un nebeut notennoù.

Hounnezh da gentañ-tout : Bro-Gorsika a zo bet prenet gant Bro-C'hall, prenet digant Republik Genoa. Ur republik e oa Bro-Gorsika neuze : prenet eo bet gant ur rouantelezh. Un demokratelezh e oa Bro-Gorsika : paouezet he deus da vezañ un demokratelezh p'eo bet prenet gant Bro-C'hall e 1768.

Ar gounid diwar-se evit pobl Gorsika ? E-penn kentañ ar c'hantved-mañ e oa 300.000 den o vevañ e Korsika, an holl anezho, war-bouez ar prefed hag ar jandarmed, Korsikiz ; e 1923 e oa 283.000 den e Korsika, 270.000 anezho Korsikiz (95 %) ; e 1962 e oa 180.000 den o chom er vro, 170.000 anezho Korsikiz (95 %) ; e 1982 e oa 240.000 den er vro, 150.000 anezho Korsikiz : da lavarout eo 62 % hepken. Abaoe 1962 : 20.000 Korsikad nebeutoc'h, 80.000 nann-Korsikad mutoc'h.

War-dro 1790, e oa 144.000 hektar dindan ed, e 1733 e oa 38.000 hag hiziv 4.000.

E 1900, e oa 700.000 penn-chatal, hiziv n'eus ket an hanter.

War-dro 1870, en AIACIU, e teue 2.000 den da ziskouez 3.000 seurt dis-

heñvel a vadoù oberiet pe gouezet er vro. Hiziv e vez enbroet e Korsika talvoudegezh 700 miliard (a lurioù kozh) a draoù.

Barrek eo bet ar C'hallaoued evit distrujañ ar vro : d'an 21 a viz Ebrel 1818, o deus savet, dre lezenn, un tailh maltouterezh war an holl vadoù degaset eus Korsika da Vro-C'hall : un nebeut bloavezhioù war-lerc'h, e kroge ar re yaouank da vont da gargidi pe da soudarded : hiziv ez eus 7 Korsikad o vevañ en harlu evit kement hini a zo o vevañ er vro.

Ha distruj ar yezh hag ar sevenadur, ma ne vez ket muzuliet ken aes gant sifroù, a zo bet ken spontus all ivez.

--

E-pad pell eo chomet morgousket Korsikiz. Rener kozh "A MUVRÀ", a oa e darempred, a-raok ar brezel, gant "Breiz Atav". Kement-se avat a oa nebeut a dra. Met abaoe ugent vloaz, eo dihunet Korsikiz, ha dihunet-mat. Ha klevet eo bet trouz o dihun ! Kêriadennoù bihan 'zo, kollet er menezioù, a anavezere bremañ o anvioù e pep lec'h : ALERIA (ar stourm evit an douar, 1975), BASTELICCA (ar stourm a-enep ar varbouezet deut da aozañ tagadennoù a-enep d'ar vroadelourien, 1980, ha bep taol, skoazell ar bobl 25.000 den er straed e 1975 evit dieubidigezh E. SIMEONI, 15.000 den evit BASTELICCA. Dont a ra, e-kelt-se, ar stourm renet gant an Talbenn-Dieubif (F.N.L.C.) da vezañ kaletoc'h-kaletañ. Ma ne vije ket bet trec'h MITTERRAND e 1981, e vije bet, anat eo, lazhadeg en enezenn.

--

Kerkent ha diskleriet gant ar gouarnamant nevez e vefe graet mouezhiadegoù rannvro e Korsika, ha rannet ar plasoù er C'huzul-Rannvro hervez kementad ar mouezhioù, en deus diskleriet strollad SIMEONI, an U.P.C., e kement-se perzh er votadeg - er c'hontrol d'an F.N.L.C. ha d'ar strollad tost outañ, ar C.C.N. - Nac'het he deus an U.P.C. daoust m'he doa galvet an dud da votiñ evit MITTERRAND en em ziskleriañ nag eus an tu daou, nag eus an tu kleiz. Ha daoust m'essaint a-du evit an emrenerezh-diabarzh, o deus savet ur roll-labour o tislpegiñ petra rafent e framm ar statud a-vremañ na vefant anvet. "N'hellomp ket bezañ laouen gant ar statud distez-se, emzo, dalc'het

e vo da stourm evit an emrenerezh-diabarzh met degemer a reomp ar statud evel ur c'hammed kentañ".

Ar raktres-labour a oa savet evit reiñ he nerzh en-dro d'ar vro, a-enep d'ar strolladoù gall hag a-enep d'ar "c'hlanioù" - e-giz e vez lavaret - : ar "c'hlanioù-se, kouls a-gleiz hag a-zehoù, o doa, dre ur gwir Yalta politikel rannet etrezo ar vro hag he zud. Hep komz eus an arc'hant, anat eo. Kinnigoù talvoudus-tre a oa evit al labour-douar, ar c'hoaderzh, ar peskerezh, an douristezh (war an 300 miliard gouezet bremañ gant an douristelezh, ez a 200 gant an trustoù estren ; teurel evezh : e miz Gouere hag e miz Eost, 6 tourist a zo er vro dre bep Korsikad), an artizanelezh hag en ijinerzh, ar c'henverzh, an dezo-gerezh, an energiezh (67 miliard a vez dispignet bep bloaz evit ar fuel pa chom dizimplij an dour, an heol hag an danvez-go), ar yec'hed, ar c'helc'h-bevañ, an dilastezañ, ar sportoù, al labour (33 % hepken eus an dud o deus un implij, hag eus an tu all ez eus bet enbroet 15.000 Italian ha 30.000 Maghreb). War daou boent e fell din pouezañ :

- 1 - Gouenn a ra an U.P.C. ma vo roet an holl implijoù nevez da Gorsikiz, ma vo roet da Gorsikiz an holl implijoù en em gavo vak, ma vo sikouret an enbroidi da vont en-dro d'ho broioù.
- 2 - Gouenn a ra an U.P.C. ma vo kelenmet ar c'horsikeg dre ret en holl skolioù ha ma vo kroget da gelenn dre ar c'horsikeg. Ar c'horsikeg a rank bezañ implijet dre ret er vuhez foran. A-du emañ an U.P.C. gant an divyezhegezh "klok", da lavarout eo, e tle ar c'hallegerien deskif korsikeg evel m'eo boas, abaoe pell, ar gorsigerien da zeskif galleg.

--

N'eo ket bet kavet fall ar roll-labour-se, emichañs, gant an dud, peogwir he deus bet an U.P.C. 7 den anvet (61 den a zo er C'huzul). Un dra pouezusoc'h c'hoazh : an noll strolladoù gall, pe a-gleiz, pe a-zehoù, a zo bet rannet etre daou, ur gonteseñn a-du gant ar statud, ur gonteseñn all a-enep. O sellout ouz ar sifroù, en dije gallet SIMEONI bezañ anvet da rener, peogwir e oa 23 M.B.G. (kleiz) a-dal d'ar 6 U.D.F. ha d'an 20 R.P.R. SIMEONI, gant e 7 den, hag an daou all a-du gantañ (un emrener hag ur broadelour) a oa gouest d'ober skañf-

bouez. Rener an U.D.F., ROCCA-SERFA, avat, a nac'has votañ evit an den kinniget gant an R.P.R. : peogwir e oa-eñ, FOCCA-SERRA, a-du gant ar statud (Rener en R. P.R. o vezañ a-ene) hag ivez peogwir e oa, etrezo, tabutoù "klan". Kense 'ta, n'en doa ket mui ezhomm an tu-kleiz eus SIMEONI. Rener an M.R.G. (ALFONSI) a voe anvet da rener ar C'huzul-Rannvro : pezh na vo ket gwall vat evit Korsika. An nav mouezh korsikat a chomas gant SIMEONI, ne vorent roet na d'an tu-kleiz, na d'an tu-dehou.

En nozvezh ar vouezhiadeg vras en doa diskouezet an F.N.L.C. e soñj : 99 tarzhadenn a zo bet, holl d'ar memes eur. Echu gant an "arsav-brezel". Reñf a rai an F.N.L.C. e chafas d'an U.P.C., met war evezh e chomo.

--

N'o deus ket kredet Korsikiz e vefe gouest an U.P.C. da c'hounit. Bremañ, pa welont pegen brav eo deut an traoù ganti, e sav keuz dezho da vezañ chomet dindan gazel-ge. "Va vefe graet ar mouezhiadegoù en-dro", a lavare din Lucien FELL, "eo 15 huzuliet a vefe ganomp, ha n'eo ket 7". Ouzhpenn-se, zoken ma'z eo bet onestoc'h ar mouezhiadegoù eget ar gwechoù a-raok, n'heller ket lavarout int bet leal-tre : an arme, ar jañdarmed, al "Legion Etrangère", o deus votet ; ar perc'henned eil-treiz, 80.000 anezho, ar re bet prenet ganto apartamantoù diwar raktrez ! Korsikiz an hariu n'eus ket bet tu dezho, allies, da lakaat o anv. Ouzhpenn-se (di-bab ar vroadelourien eo bet) ur bern tud yaouank a zo chomet hep votañ. Daoust da se eo laouen tud an U.P.C. : set int en holl gêriademoù bihan, SIMEONI e-unan a zo bet e 400 bodadeg, lakaet an dud da gonz, roet fiziañs dezho, bodet o deus en hevelep sal tud hag a oa enebour abaoe bloavezhioù, a-wechoù abaoe remziadoù. A-drugarez d'ar statud-se, forzh pegen diste e vefe, ez eus un dra bennak kemmet e Korsika. Emañ Korsika en hent war-du ar frankiz.

A-bouez eo evidomp e vefe bet ar mouezhiadegoù-se e Korsika. Lezenn nevez ar "Rannvroioù" a zo bet embannet d'an 2 a viz Meurzh 1982. Kalz gwelloc'h eo eget hini GISCARD (5 a viz Gouere 1972). Hervez al lezenn-se e vo meret ar "rannvroioù" gant ur c'huzul anvet dre vouezhiadeg, an holl o votif, hag o votif war-eeun, evit ar guzulierien. N'eus netra avat el lezenn o lavarout e vo niver ar guzulierien gant pep

strollad diouzh niver ar mouezhioù das-tumet gantañ. Ouzhpenn-se ez eus bet lavaret da gentañ e vefe graet ar mouezhiadegoù e 1983 - goude ez eus bet komzet eus 1984 ha bremañ e komzer eus 1985 ! Peogwir int bet graet e Korsika ez eus spi da gacut, evit gwir, e vint graet e lec'h all, un devezh bennak, hag e vo anvet ar guzulierien diouzh niver ar c'hementad-mouezhioù, evel e Korsika, ha n'eo ket ar muiañ-mouezhioù. Kuden Bro-Naoned a zo ivez evit Breizh. Met ur gudenn all c'hoazh : trist e vefe gwelout div listenn vreizhat, unan eus an tu kleiz, a-hervez, hag unan all a nac'hfe bezañ eus an eil tu pe egile. Emichañs e vo fur a-walc'h ar Vretoned evit kinnig ul listennad hepken.

--

Arabat soñjal e tegaso deomp ar "rannvroeladur" - ha n'eus tra c'hoazh o reñf deomp da grediñ e vo koulz hag hini Korsika zoken - Kement tra a zo ezhomm. War dachenn ar sevenadur, e-giz e lavarer, e vo, dreist-holl, da stourm. Setu, hervez lezenn an 30 a viz Gouere eus ar bloaz-mañ, petra a zo lezet da Gorsika e-keñver yezh ha sevenadur (mellad 2, Rannbennad I, Pennad I) "War ginnig e rener, ha goude kuzuliat gant ar departamantoù ha gant Kuzul ar Sevenadur, an Deshadurezh hag ar Framm-Bevañ, e tibabo ar C'huzul Rannvro pe-seurt kelennadurezhioù a vo aozet en-ouzhpenn gantañ, dreist-holl evit pezh a sell ouzh deshadurezh ar yezh Korsikat hag ar sevenadur korsikat. Diwar zibab e vo ar c'hentelioù-se evit ar skolidi ha ne c'hellint e doare ebet kemer plas ar c'hentelioù raklakaet e rolloù-labour ar c'helennadur hag ar stummadur". Da lavarout sklaer : ne vo lakaet ar c'horsikeg, ma karer, nemet en toulloù lezet gant gouarnamant Pariz. Pell emañ Yann eus e gazeg; hag an U.P.C. eus hefal.

Un nebeut kammedoù a zo bet graet war-dru ar rannvroelaat armerzhel ; un nebeut kammedoù emeur oc'h ober war-du ar rannvroelaat politikel. N'eus bet graet kammed ebet c'hoazh war-du ar rannvroelaat sevenadurel. Zoken gant ar gouarnamant-mañ.

Tenn e vo ar stourm hag hir an hent !

Per DENEZ

IWERZHON

DISOC'HOU AR MOUEZHIADEGOU EN IWERZHON AN HANTERNOZ

- Official Unionist	= 26 kannad
- Democratic Unionist	= 21 "
- S.D.L.P.	= 14 "
- Alliance	= 10 "
- Sinn Fein	= 5 "
- Independent Unionist	= 1 "
- Ulster Popular Unionist Party	= 1 "
- Niver hollek a vouezhierien	= 1.480.807
- Niver hollek ar re o deus mouezhiet	= 632.662
- Dregantad	= 60,3 %
- Dregantad a vouezhioù didalvoud	= 3,2 %
- Official Unionist	= 188.277 mouezh
	29,8 %
e-lec'h 26,5 % e-koulz ar mouezhiadegoù diwezhañ.	
- Democratic Unionist	= 145.478 mouezh
	23 %
e-lec'h 26,6 %	
- S.D.L.P.	= 118.891 mouezh
	18,8 %
e-lec'h 17,6 %	
- Sinn Fein	= 64.191 "
	10,2 %
N'en doa ket ar Sinn Fein kemeret perzh er votadeg diwezhañ.	
- Alliance	= 58.887 mouezh
	9,3 %
e-lec'h 8,8 %	
- Workers Party	= 17.216 mouezh
	2,7 %
N'en doa ket kemeret perzh	
- Ar re all	= 28.797 mouezh
	4,6 %
e-lec'h 14 %	



● GERRY ADAMS S.F. West Belfast



● OWEN CARRON S.F. Fermanagh/South Tyrone

- Belfast Reter	= 6 kannad
	O.U. = 2 - All. = 2
	D.U.P. = 2
- Belfast Norz	= 5 kannad
	O.U. = 1 - All. = 1
	Ind. U. = 1
	S.D.L.P. = 1
	D.U.P. = 1
- Belfast Su	= 5 kannad
	O.U. = 3 - All. = 1
	D.U.P. = 1
- Belfast Kornog	= 4 kannad
	S.F. = 1 - All. = 1
	S.D.L.P. = 1
	O.U. = 1
- Antrim Norz	= 8 kannad
	D.U.P. = 4 - O.U. = 2
	S.D.L.P. = 1
	All. = 1
- Antrim Su	= 10 kannad
	O.U. = 4 - D.U.P. = 3
	All. = 2 -
	S.D.L.P. = 1



● DANNY MORRISON S.F. Mid-Ulster



● JIM McALLISTER S.F. Armagh

- Armagh = 7 kannad
D.U.P. = 1
S.D.L.P. = 2 - S.F. = 1
O.U. = 3
- Down Norz = 8 kannad
O.U. = 3 - All = 2
U.P.U.P. = 1
D.U.P. = 2
- Down Su = 7 kannad
O.U. = 2 - D.U.P. = 2
S.D.L.P. = 3
- Fermanagh,
Tyrone Su = 5 kannad
S.F. = 1 - O.U. = 2
S.D.L.P. = 1
D.U.P. = 1
- Derry = 7 kannad
O.U. = 2 - D.U.P. = 2
S.D.L.P. = 2 -
S.F. = 1
- Kreis Ulster = 6 kannad
S.D.L.P. = 2
D.U.P. = 2 - S.F. = 1
O.U. = 1



● MARTIN McGUINNESS S.F.
Derry

Talvoudus eo gwelout 'z eus bet gounezet mouezhiañ gant an O.U. (Official Unionist) trollad Molyneux (3,3 % muioc'h) ha kollet lod gant strollad Ian Paisley (3,3 % nebeutoc'h), da lavarout eo an dregantad tud kustum da vouezhiañ evit Paisley 'n eus kavet gwelloc'h lakaat an O.U. da drec'hif.

Ar Sinn Fein 'zo deut da vezañ pevare strollad politikel ar vro dre e niver mouezhiañ. Daoust da-se, an Alliance Party gant un niver mouezhiañ bihanoc'h en deus div wech muioc'h a gannaded. Burzhudus, neketa !

Ar strolladoù bihan all 'zo bet

rasket. Diskouez 'ra kement-se 'z eus bet mouezhiet evit ar strolladoù krefv da gentañ, pezh a gaso ar vuhez politikel da vont war daeraat.

Talvoudus 'vefe marteze displegan d'hol lennerien penaos 'vez dilennet ar gannaded er vro bremañ. Lakaomp da skouer 'vefe pemp kannad da vezañ dilennet e lec'h-mañ-lec'h. Pep strollad a ginnig neuze un niver bennak a zanveziou-kannad, hervez e nerzh, e arc'hant, hag all ... Kement hini o vont da vouezhiañ 'n em gav neuze gant ul listennad anvioù hir a-walc'h ha mouezhiañ 'ra div wech. Reif 'ra da gentañ anv e zibab kentañ ha da c'houde anv e eil dibab. Setu perak eo anvet ar sistem-se ar "Preference Vote" ["P.R. System"]. Pep pastell-vro 'deus un niver resis a c'hannaded da vezañ dilennet. Kemeromp skouer Armagh hag he seizh kannad. Eno 'z eus 95.610 a dud o deus ar gwir da vouezhiañ. 66,9 % anezho o deus mouezhiet. Gant-se e teuer a-benn da gaout ur "quota", da lavarout eo an niver mouezhiañ eo ret kaout evit bezañ dilennet. 7.739 'oa "quota" Armagh. Sed amañ penaos int bet dilennet en Armagh :

- 1 - David Calvert (D.U.P.)
- 2 - Seamus Mallon (S.D.L.P.)
- 3 - James McAllister (S.F.)
- 4 - Harold McCusker (O.U.)
- 5 - Hugh News (S.D.L.P.)
- 6 - Mary Simpson (O.U.)
- 7 - James Nicholson (O.U.)

Met kement-se na dalvez ket eo bet anvet end-eeun H. McCusker da skouer. Marteze n'en deus ket tizhet ar "quota" Lakaomp en dije bet 6.000 mouezh. Man-kout 'ra 1.739 evitañ da vezañ dilennet Bez e oa a-dra-sur danveziou-kannad all war-lerc'h J. Nicholson gant un niver mouezhiañ re vihan evito da vezañ dilennet. Jedet 'vez neuze niver resis an "eil dibab" aet gant McCusker. Da skouer, a-dra-sur 'z eus bet tud o vouezhiañ evit M. Simpson da gentañ hag evit McCusker da c'houde. Jedet 'vez neuze o niver hollek ha gant niver ar mouezhiañ kentañ dibab e teu a-benn da dizhout ar "quota". Da skouer Gerry Adams 'n'eus bet 9.740 mouezh, dibab kentañ e Belfast Kornog, (6.853 oa ar "quota" da gaout). Pa n'en deus bet nemet 627 anezho un ezel all eus ar Sinn Fein en hevelep pastell-vro.

An doare-se da vouezhiañ 'vez implijet er Republik gant un nebeudig traoù a-ziforc'h ha ne vez ket e Breizh-Veur. Kredif a reer eo ar muiañ demokratel 'c'heller kaout dre ma ro tro d'ar strolladoù bihan da gaout un nebeut kannaded dilennet. Implijet eo bet en Hanternoz betek ar bloavezhioù 1920 ha dilezet gant an "Unionisted" pa ne felle ket dezho rannañ ar galloud gant ar vroadelourien. 50 vloaz goude eo bet adimplijet evit sikour ar strolladoù bihan met dreist-holl evit reif lañs d'ar strolladoù "kreizourc'h" pe sioulloc'h evel an "Alliance Party" pe an "S.D.L.P.". Tizhet en deus ar pal kentañ daoust m'en dije ar Sinn Fein dleet kaout daou pe dri c'hannad muioc'h (e-kefver jedoniezh) met n'eo ket deut a-benn da grefvaat nag an "Alliance Party" nag an S.D.L.P. Evel ma lavar an Dr. Sydney Elliot, skiantour war ar politikerezh e skol-veur Queen Belfast : "An Unionisted a vouezhio evit ar strolladoù unvaniezhel hag un nebeudig anezho a c'hellou mouezhiañ evit an "Alliance Party". Met setu holl. Gour na vouezhio evit an S.D.L.P." E gwirionez n'eus nemet 0,5 % eus ar mouezhiañ Unionist pe vroadelour vije bet gounezet gant ar strolladoù kreizour.


Ma plij an doare-se da vouezhiañ d'ar strolladoù gwano'h ha kreizour, ne blij tamm ebet d'an Unionisted. John Molyneux, rener an "Official Unionist Party" en deus lavaret n'en doa "ster ebet", rak hir ha koustus 'oa. Gwir a-walc'h eo. War listennad Antrim Su voe kavet 26 anv (!!) evit dek kannad. Tost da zaoz zevhez voe ezhomm evit dilenn an dek anezho. 75 den voe ezhomm evit jedañ an dibaboù kentañ hag an eil re, ha jedet voent 23 gwech dihevel !!!

Daoust da-se disoc'hoù ar mouezhiañeg-mañ a zere brav a-walc'h ouzh stad politikel ur vro rannet groffs etre div gevredigezh ken aheurtet an eil hag eben, hag ur c'hreiz manet sac'het.

TREC'H AR SINN FEIN

Gant disoc'hoù ar mouezhiañegoù o vezañ anavezet Dipwener 22 a viz Here e tride kalon ar Republikaned gant al levenez hag hini ar Saizon gant an dispi. 10,1 % pa voe soñjet n'o dije ket muioc'h eget 3 %. Al law republikan, lanv ar Sinn Fein en deus skubet epi Maggie hag hini James Prior pa grede dezho e teufent a-benn da adstaliañ ur parlamant "dieub"

en Hanternoz. An S.D.L.P., strollad John Hume (Social and Democratic Labour Party) 'zo deut a-benn da chom stabil a-walc'h gant 18,8 % eus ar mouezhiañ. An "Alliance Party" en deus kresket un tamm : 0,4 % muioc'h, 9,3 % en holl. Kevezerezh stakt 'oa ivez etre strollad Ian Paisley an "Democratic Unionist Party" hag hini James Molyneux an "Official Unionist". Gant an hini "ofisiel" eo deut ar maout. Ar strolladoù unvaniezhel ("unionist") bihan (O.U.P., D.U.P.) 'zo bet rasket.



TREC'H GERRY ADAMS

War ur poent nemetken emañ a-du an holl : a-drugarez da Gerry Adams is-rener ar Sinn Fein, pe dre e wall evit e enebourien, eo deut e strollad a-benn da lakaat 5 ezel da vezañ anvet gant 64.191 dibab kentañ ha daou all war-nes bezañ dilennet. Goude an disoc'hoù en deus diskleriet : "Trec'h ar stourm republikan a-enep an alouberezh saoz an hini eo".

E-koulz an emvodoù a-rack ar mouezhiañegoù n'en deus morse ar Sinn Fein kuzhet e englev gant an I.R.A. Ur gwall daol eo bet evit ar re a lavare dalc'h-mat n'en doa an I.R.A. diazez ebet a-nesk ar boblañs vroadelour. Un ezel pouezus eus ar Sinn Fein en deus lavaret kement-mañ : "Gouzout a ouzomp hor bos pouez bras er gevredigezh vroadelour. Bremañ eo bet prouet ganemp".

Ur skouer eo Gerry Adams. Skouer ar bactedred yaouank deut da gwer renerañ ar stourm politikel abaoe ar bloavezhioù 1970. 33 vloaz eo ha tost-tre ouzh menozioù Connolly.

Stlapez eo bet e Kamp Long Kesh e 1971 dre ma krede ar Saezon 'oa rener an I.R.A. e Ballymurphy, ur c'harter broadelour e Belfast. Kaset eo neuze da Vro-Saoz da sinañ un arsav-brezel gant an arme saoz. Bloaz goude 'vez toullbac'het adarre. Laret 'vez eo rener an I.R.A. e Belfast a-bezh ar wech-mañ. Trement 'ra ar bloavezhioù-se da brederiañ, da skrivañ ha da gomz gant ar republikaned all toullbac'het eveltañ. Dont a ra da ana-vezout Bobby Sands ha Klask a raio lakaat anezhañ da zilezel e zicuerboued, en aner siwazh.

Kalzic tud voe souezhet o klevout anezhañ o lavarout e 1979 : "Ne vo ket gounezet ar brezel gant an armoù nemetken met ivez gant ar politikerezh dre ma vo gouest an ensav republikan da ziorren un dibab politikel nevez a vo lakaet e-lec'h ar reolennoù a suj Iwerzhon an Hanternoz hag ar Republik."

Stourm an diouerboued ha marv Bobby Sands a lakaas renerezh politikel ar Republikaned da gemer perzh er mouezhiadegoù.

UR GWALL DAOL EVIT J. PRIOR HA MAGGIE

Echu an huñvre. Da vat. Anvet 'oa bet J. Prior gant Maggie evit ren Norz Iwerzhon. Evit diskouez e varregezh e Klaskas adstalliañ ur parlamant e Belfast. Dav 'oa gwelout e benn er skinwel pa oa o lenn an disoc'hoù evit gouzout pegen frouezhus oa bet e daol. Abaoe 1969 emañ Westminster, da lavarout eo ar parlamant saoz o ren aferioù Iwerzhon an Hanternoz, abaoe m'eo bet rasklet ar Stormont, ar parlamant staliet e Belfast. An Ao. Prior a soñje dezhañ e vefe deut a-benn da ober ar pezh n'o deus ket kredet ober ar gouarnantoù saoz bet er galloud abaoe 69, mirour pe labour. N'eo ket deut a-benn eveljust, met gwashoc'h c'hoazh, deut eo a-benn da ziskouez pegen kreff eo ar vroadelourien. Gwashoc'h eget ur fazi, ur wallegezh an hini eo bet.

Kalzic tud e Londrez a grede dezho n'o dije ket tro ken da welout J. Prior er gouarnamant. Met an holl 'oar pegen pennek eo Maggie. Ha daoust m'o deus an S.D.L.P. hag ar Sinn Fein nac'het groñs kemer perzh er parlamant nevez-se, diskleriet eo bet gant J. Prior : "Gouzout a reomp e kemero perzh an Official Unionist, an Democratic Unionist hag an Alliance Party er parlamant nevez, hag int 'zo ar brasañ niver a dud bet anvet. Ne welan ket perak neuze n'ez afe ket ar

parlamant-se en-dro".

Emañ ar sekretour stad o klask lakaat an S.D.L.P. da cheñch hent ha da lakaat anezho da zont da azezañ er parlamant. Diaes-tre eo da gompren e emzalc'h.

Da gantañ peogwir eo bet rasklet ar Stormont dre ma voe berzet ouzh ar vroadelourien. Ha setu eñ o klask adstalliañ ur Stormont nevez hep ar vroadelourien.



• JIM PRIOR

D'an eil peogwir emañ o klask gounit kannaded an S.D.L.P. hag eñ gant e vouezhiadegoù an hini en deus lakaet ar strollad kreizour-se da goll mouezhioù (hep ar Sinn Fein, an S.D.L.P. en dije bet kalz muic'h a vouezhioù hag a gannaded).

D'an trede, dre forzh klask lakaat ar strolladoù "kreizour" (S.D.L.P. hag Alliance Party) da c'houit mouezhioù ha da greñvaat n'eo deut a-benn nemet da wanaat anezho ha dre-se da greñvaat ar strolladoù taeroc'h da lavarout eo an "Unionisted" hag ar Sinn Fein.

FEULSTER ADARRE

Gant disoc'hoù ar mouezhiadegoù-se eo bet diskouezet splann pegen don eo ran- net an Hanternoz. Ha J. Prior ha Maggie zo da vezañ tamallet 'vit kement-se. Int, hag int o-unan 'zo kiriek. Foll- entez eo klask adsevel ur parlamant stummet evel ar Stormont gwechall.

Kantadoù a dud zo bet lazhet evit se ha kantadoù a vo lazhet c'hoazh ma vez graet. An holl o deus lavaret da foll- entez klask en ober, e Breizh-Veur hag en Iwerzhon a-bezh. Marteze eo bet tizhet J. Prior gant klefved Maggie : viruz ar gasoni hag an abeurterezh sot. Marteze ivez e soñje dezho 'vijent bet disammet gant kudenn Iwerzhon dre un taolig mouezhiadeg p'emañ ar c'hrign- bev Iwerzhonat o vreinañ o duhez abaoe pemp kant vloaz bennak. Diskiant a- greñt int bet. Diskouezet o deus pegen dizampart int war gement tachenn a zo. Diskouezet o deus pegen dizek hag hegrek int war an dachenn Iwerzhonat. Ur wech nemetken eo aet Maggie da Iwerzhon an Hanternoz. Petra 'deus graet ? Mont da zibunañ er c'harter protestant



Dilabour e Breizh Veur : 3.295.128 (13,9 %)

Sinn Fein : 64 191 (10,2 %)

Fall an traoù, Mag

gwisket e parachutist saoz !!! Evit sioulaat an dud sur a-walc'h.

Kiriek int eus marv J. Donegan, tapet ha lazhet gant an U.V.F. peogwir en doa an I.R.A. tapet an Ao. Cochrane, ezel eus ar R.U.C. dres goude an disoc'hoù. Adkavet eo bet korf an Ao. Donegan en ur straed ur bolod en e benn. Peder eur goude eo bet adkavet korf an Ao. Cochrane ur bolod en e benn.

Kiriek int eus marv an tri soudard lazhet gant tarzhadenn ur vombezenn dacu zevezh goude ar mouezhiadegoù ha nebeut goude marv J. Donegan.

Daoust da-se en deus J. Prior diskleriet er B.B.C. : "Evidon-me, kement-mañ n'eo nemet an derou". Ha Doue !!!

"Ne gred ket din vefe goulennet diganin reiñ ma dilez, rak ma folitikerzh zo hini gouarnamant ar Rouanez".


Ha netrakenn !!!

Herle DENEZ

MOR

IMPLIJ NERZH AR MOR

Studiet en deus an N.B.S.T. Iwerzhonat (National Board for Science and Technology) e-pad 3 bloaz an doareoù gwellañ hag al lec'hioù efedusañ evit kaout energiezh dre implij nerzh ar mor. Pemp lec'h a oa bet dibabet evit kas ar studiadennoù da benn (gw. ar gartenn). Mat eo bet an disorc'hoù evit 4 anezho ha mat a-walc'h evit Rosslare. Met ar pezh a vir ouzh an deknikourien da lakaat seurt kreizennoù da vont war-raok n'eo ket kement-se ar c'hudennoù teknel met ar c'hudennoù arc'hant. An holl re a vefe dedennet gant levra a zo bet embannet gant an N.B.S.T., skrivañ da : N.B.S.T., Shelbourne Road, DUBLIN 4 - priz = 2 lur sterling.



SAOTRADUR MOR-IWERZHON

Brein eo Mor-Iwerzhon gant ar saotradur skinberiek (radio-actif). Setu klozadur un enklask bet kaset war-raok gant skiantourien deus Queen's University e Belfast ha deus Burev er Pezkerezh er Suffolk. N'en deus ket tizhet ar saotradur "ul live dañjerus" c'hoazh, met koulskoude, pa lenner ar studiadennoù bet kaset da benn gant ar skiantourien e vezer gwall-enkrezet.



Dregantad ar c'haezium 137 a gaver e mor Iwerzhon. An dour saotret-se a vez lezet da vont deus kreizenn nukleel Windscale.

Kavet e vez, da skouer, pesked "distummet" ("gwallstummet" ma fell deoc'h !) abaoe ur pennadig e Mor-Iwerzhon ; kement-se a zo bet gwiriet gant pesketourien Enez-Manav. Gouzout a car an holl ez eo ar mor-se unan eus ar "poullou-pesked" fonnusaf er bed, ha koulskoude e seblant bezañ diouennet al lodenn ar muian Reter deus Mor-Iwerzhon, da larout eo, a-hed aodoù Cumbria.

En abeg d'ar greizenn nukleel a zo bet savet e Windscale (gw. ar gartenn), e Bro-Saoz, eo e vez saotret ar mor. An dour a servij da yenaat kalonoù ar greizenn eo a zo saotret, an dour-se a vez lezet da vont d'ar mor adarre, evel-just ... Daoust da-se, e chom, a-dra sur, an energiezh nukleel "un energiezh prop, marc'hamat, dizafjer" hag all, hag all .. an holl ac'hanomp a anavez ar ganaouenn !

Ar bed Keltiek

LEVRIOU
PLADENNOU

2, STRAED AR ROUE GRALON
KEMPER - PG/95-42-82
REMER : GWELTAZ AR FUR

KEMBRE

IJINEREZH AN DOURISTELEZH E 1982

Unan eus ijinerzhioù pennañ Kembre a-benn-bremañ eo an douristelezh. Un ijinerzh koulz-bloaz eo evel e meur a vro all ha diouzh amzer an oabl hag hini an armerzh e vez e verz.

Hevlene da skouer e lavarer eo bet fall ar c'houz touristel e-skoaz ar pezh e oa bet pemp bloaz 'zo. N'eus forzh penaos kement-se ne vern ket kalz da galkiz Kembreiz, laouen int bet o welout nebeutoc'h a Saozon en o bro hag o c'hellout ober o mad eus o zraezhennoù hag o menezioù e-pad an haf. Ne wele ket an holl an traoù er memes doare, anat eo. Perc'henned ostalerioù kêrioù arvor Kembre, kêrioù evel Y Rhyl e Bae Colwyn, Llandudno en hanternoz, Porth-cawl ha Dinbych y Pysgod er c'hreisteiz a zo bet o klemm o doa kollet arc'hant. Gwir eo ivez eo Saozon al lodenn vrasañ eus ar berc'henned ostalerioù en hanternoz hag e c'hoprout tud ar vro da labourat e-pad an haf. Perc'henned an tachennoù kampif ha karavanennif a gav abeg da glemm ivez dre m'o deus graet nebeutoc'h a c'hounid ar bloaz-mañ. Ur vammenn a c'hounid eo ivez an douristelezh evit an dud diwar ar maez, n'eus ken gwelout an holl arouezioù "Bed and Breakfast" a-hed an hentoù er vro a-bezh.

Kalz a Gembreiz a soñj avat ne zegas ket an douristelezh nemet madoù d'he heul - reif a ra labour da viladoù a dud, sur, mes e-pad koulz an haf hepken ! Degas a ra er c'hornioù-bro kembraek ul lanvad Saozon. Dre chafis e ya en-dro ar Saozon d'ar gêr goude an haf ! Pelloc'h e soñj da galz tud e Kembre e tleer goro ar muian ar gwellañ ar Saozon e-pad an haf a-raok o c'has d'ar gêr !

An dro-spered-se eo a zegas bep ar mare deomp steuñvennoù, seblant a-zoare warno, hogen pa vez sellet a-dostoc'h outo e weler e tegasont ur chefc'hant e doare bevañ ar gevredigezh lec'hel penn-da-benn da dalan ouzh ezhommoù an douristelezh.

Da skouer, nevez 'zo, ez eus bet kinniget gant Burev Degemer Kembre (Bwrdd Croeso Cymru) ur steuñvenn a ginnig sevel war-dro 12 marina (kreiz-ennoù evit ar vageerezh lien bras) a-hed aodoù Kembre. Labour a c'hell degas an dra-se da galz a Gembreiz e kêrioù an arvor, lec'hioù evel Abertawe, Aberaeron, Aberystwyth, Pwllheli ha Caergybi, kalz muoc'h eget an douristed da vageal ivez met war-un-dro e vefe ur c'hresk spontus eus niver an eil tiez er c'hornioù-bro-se pezh a chefc'he natur ar gevredigezh lec'hel. Saozneaat a rafe kevredigezhioù kembraek evel en Aberaeron Un dañjer eo al lanvad Saozon a zeufe da implijout ar marinaoù-se. Dav eo lavarout n'eo ket gwall droet Kembreiz gant ar mor bremañ ha n'eus ket ezhomm sevel daouzek marina a-hed o aodoù.

Un toullad mat a vloavezhioù 'zo ez eus bet krouet ur bodad ispisial d'ober war-dro ijinerzh an douristelezh e Kembre ha da zedennañ muoc'h a douristed d'ar vro. Bwrdd Croeso Cymru eo anv ar bodad-se hag en e furze en deus dibabet envel 1983 bloavezh ar c'hastelloù da zedennañ muoc'h a douristed dreist-holl da gerioù evel Dinbych y Pysgod, Caerdydd, Rhuddlan, Conwy, Caernarfon ha Bwmaris e lec'h ma' z eus kastelloù kozh bras eus ar Grenn-Amzer perc'hennet gant aotrounez saoz.



1983, BLOAVEZH AR C'HASTELLOU

Dibab 1983 evel bloavezh ar c'has-telloù en deus graet da lod eus Kembreiz

mont en araj. Dav eo kaout soñj eo kastelloù saoz ha norman ar re bet meneget kent. Savet eo bet kastelloù Conwy, Caernarfon ha Bwmaris gant Edward Iañ a Vro-Saoz goude bezañ trec'het Llywelyn, priñs diwezhañ Kembre.

Lazhet e voe Llywelyn (pe Llywelyn hon roue diwezhañ evel ma ra Kembreiz anezhañ) e Cilmeri e-kichen Llanfair-ym-Muallt e kreiz Kembre e miz Kerzu 1282. Eñ a voe, hervez istorourien Kembre, ar c'hembread nemetañ bet priñs Kembre. E varv a gasas gantañ dizalc'hidigezh politikel Kembre. Daoust pegen pouezus eo an 800vet deiz-ha-bloaz-se da Gembreiz en deus kredet Bwrdd Croeso Cymru treif kein ouzh istor ar vro ha kinnig lidañ trec'het Edward Iañ war Llywelyn.

Nebeut-tre a gaoz a zo bet diwar-benn Llywelyn er bloaz-mañ - bodad ofisiel ebet n'en deus graet striv ebet evit lakaat an dud da gaout soñj anezhañ. Marteze n'eo ket un dra vat d'erc'hel koun eus aotrou gladdalc'hel Kembre met ur vezh eo ankounac'haat marv an den en deus krouet un doare gouarn politikel dizalc'h e Kembre en 13vet kantved.

JOHN IDRIS



sk: P. An Habask

Ar skeudennoù a ziskouez panelloù o vrudañ ar pevare chadenn (SIANEL PEDWAR CYMRU). Un doare all da zegas labour da vro Gembre.

BREIZH

DIAESTERIOU AL LABOUR-DOUAR E BREIZH

An enkadenn armerzhel zo un darvoud strevroadel. Ret eo eta mont gant ur sell ledan a-walc'h evit kompren emdroadur :

- lodennerezh ar boblañs (kevredadoù labour)
- ar gounid,
- ar c'henstourmoù,
- an darempredoù etrevroadel :
 - . kenwerzh,
 - . broioù paour an "Trede bed",
- emzalc'h an elfennoù oberierezhel,
- ar vuhez war ar maez,
- hag all

UN TAMM ISTAR :

Div gemmadenn o deus lezet roudoù war-o-lerc'h :

- Ur gemmadenn c'hounidigezhel :
 - emzonedigezh ur c'hounidigezh douar e broioù reter ar Mor Kreiz-douarel war-dro 10.000 bloaz'zo,
 - eus ar broioù-se en em astenn al labour-douar (an doare embreger-ezhel da lakaat douaroù dindan plant pe da sevel loened) war-zu broioù Afrika hag Europa.
 - etre 4.500 ha 2.000 a-raok J.K. e teu an doare pleustrif da greiz Europa ha betek ar c'hornog.

- Ur gemmadenn c'hreanterezhel :

- tost da 10.000 bloaz war-lerc'h, adal ma vez implijet muic'h-mui ar milinoù (avel pe dour),
- menegomp levezon Bro-Saoz (XIIIvet kantved) gant he lostennad ijinou a vekanikoù, implij ar mengleuzioù houarn ha glaou.




HAG AN DISOC'H

Diazezet war al labour-douar betek dibenn an XVIIIvet kantved, an armerzh zo deut da vezañ hini ur gevredigezh c'hreanterezhel.

E-pad an emdroadur-se :

- kresk ar vevidigezh implijet gant ar c'hoskoriadoù keodedel (tost da 40 gwech muic'h abaoe an XVIIIvet kantved)
- kresk niver ar boblañs (XIXvet kantved)



KUDENNOU A VREMAN

- Ur skouer da gentañ : priz an danveziou

PRENET			KRESK % eur 1973 da 1978	GWERZHET		KRESK % eus 1973 da 1978
Temz ludu						
N %	P %	K %		Laezh 34 % dienn perzh krenn		48 %
10	20	20	62 %			
0	19	19	79 %			
0	18	0	82 %	Leue (al lur di- lastez)		36 %
Ur stlejerez 50/60 marc'h			115 %			
Ur waskell grenn implijet evit ar plouz			112 %			
Kirri-tan				Gwinizh a berzh krenn		37 %
2 varc'h			101 %			
7 marc'h			105 %			

- steuziadur an naonegezhioù,
- kenwerzh etre greanterezh ha gounidigezh,
- krouidigezh ha diazez ur marc'had framm,et,
- implij ar c'hredadoù postañ,
- XIXvet hag XXvet kantved, kresk an ampled abalamour da :

- . lamidigezh an oberiantiz hengounel, an douar leton,
- . implij an temz ludu, an traezh, plant nevez da vegañ ar chatal o kreskiñ ivez,
- . labour war spisaat (saout pe moc'h pe legumaj pe ed....)
- . savidigezh strolladoù pe gevredadoù, sindikadoù, kevelourioù (amplif, kenwerzhañ, difenn ar gorfuniad),
- . implij ar mererezh e-giz un ardivink dafar.

Y.V. An HARIDON


DEIZIATAER 1983 SKOL AN EMSAV

Kustumet eo deut an dud da vezañ bremañ gant an deiziataer a vez kinniget dezho bep bloaz, e brezhoneg penn-da-benn, gant SKOL AN EMSAV.

Luc'hskeudennoù kaer ennañ c'hoazh er bloaz-mañ ; kavout a rit e-barzh traoù ken talvoudus ha niverennoù post parrezioù Breizh gant an holl anvioù e brezhoneg, un tamm karned evidoc'h da skrivañ chomlec'hioù ha niverennoù bellgomz ho mignoned, ur bern titouroù diwar benn ar strolladoù sevenadurel ha politikel, ar sindikadoù, ar c'helaouennoù dre skrid pe dre gomz, ar c'hreizzennoù sevenadurel, ar strolladoù c'hoariva...

30 lur e kousto deoc'h ma prenit anezhañ dre lizher digant SKOL AN EMSAV 3 straed Hoche - 35000 ROAZHON ha 27 lur an tamm ma prenit 10 pe ouzhpenn !

ENERGIEZH



An heol a zo ur voullenn. Enni e kaver aezhennoù : hidrogen hag heliom. Lec'hiet da 1,510⁸ km eus an douar. An heol a ra 1,3910⁶ km a dreuz. Derez gwrez gorre an heol a zo war-dro 5.800°K, e-barzh ar c'hreiz e c'hell mont betek 4.010⁶° k.

Bep eilenn, tolzenn an heol a zigresk eus 4 milion tonenn hag a ya d'ober gwrez. An energiezh a zeu deomp goude-se dre skinoù elektromagnetek. Dont a ra betek an douar 180.000 terawatt da lavarout eo 20.000 gwech an holl ezhommoù hon eus er mare-mañ.

Bez' e ranker teurel kont eus al led, ar mare, teñvaladur an aergelc'h (abalamour d'ar c'hroumoul, d'an aezhenn-dour) evit gouzout pegement a energiezh a c'heller despugn war ur metrad karrezek.

I - Doareoù implij energiezh an heol

Tri sistem a zo evit treuzfurmiñ energiezh an heol.

- ar sistem HEOL-GWREZ. Ar skinoù a ya war-eeun d'ober gwrez. Enni e kaver :

- an hini a zerez gwrez izel : nebutoc'h evit 100° C. An energiezh a ya da dommañ an tiez pe an dour yec'hed-el. Implijet e vez despugnerzioù plaen.

- an hini a zerez gwrez krenn. An derez 'zo etre 100° C ha 600° C. Implijet e vez despugnerzioù a greizennerezh. Adalek 100° C hag eveljust betek 600° C e c'heller produiñ aezhenn-dour ha goude-se lakaat da vont kefluskerioù (motorioù) gwreznerezhiezh.

- an hini a zerez gwrez uhel deus 600° C betek 3.500° K. Ar skouer anavezet ar gwellañ eo forn heolel Odeillo. Gant 3.500° K e c'heller studiañ danvezioù dideuzus, produiñ aezhenn-dour a wask uhel ha goude-se dre gefluskerioù gwrez erzhoniezh ha tredaneriezioù fardañ tredan.

- ar sistem HEOL-TREDAN (elektrisit) Implijet e vez an efed Kompton. Skinoù an heol a ya war-eeun d'ober tredan.

- ar sistem HEOL-KIMIEZH. Amañ an energiezh 'vez implijet evit aesaat ken-dispennoù. Ar skouer anavezet ar gwellañ zo ar foto sintez. An energiezh a ya neuze d'ober ar c'hilazenn. Skinoù eeun a skign. Dont a ra an energiezh war an douar d'indan ar stumm foton dre skinoù unliv. Hirder o gwagennoù a zo etre 0,3^m ha 3^m. Ar c'hementad energiezh a sko ur gorre, ur metrad karrezek anezhañ, a-zioc'h an aergelc'h a zo 1.353 W/m² (an dra-se a zo par d'ar gorre d'indan ar grommenn. An hanter deus an energiezh a zeu deomp dre ar skinoù gweluz.

E-barzh an energiezh a vez paket gant un dra bennak e kaver :


- ar skinerzh eeun a zeu eveljust war-eeun deus an heol,

- ar skinerzh skignet, an hini nemetañ a zeu deomp dre amzer goloet.

Fin ar gont, a-benn gouzout ar pezh a c'heller despugn en ul lec'h bennak e vez implijet taolennoù jediñ.

Penaos lakaat un despugnerzh ?

Evit pakañ ar muiañ e rank an despugnerzioù bezañ a-sonn war skinoù an heol. Graet e vez a-wechoù (Odeillo) met peurluviañ ne vez ket graet. Eveljust an despugnerzioù a rank bezañ tuet ouz ar c'hreisteiz hag o stou a zo hervez ar mare implij. Pa vez implijet a-hed ar bloaz e vez kemeret ur c'horn divizet hervez al led, da lavarout eo : al led + 10°. Da skouer Kemper led : 48. Stou an despugnerzioù 48 + 10 = 58°.



II - DESPUGNADUR ENERGIEZH AN HEOL

- Despugnerzh dourenn. Anvet eo despugnerzh heol, ur sistem kad da dreuzfurmiñ skinigezh an heol e gwrez. Ar skinoù tapet a ya da dommañ un dourenn char-gwrez. Ar wrez a ya goude-se da dommañ an dour e-barzh ar baloñs.

- An efed ti gwer. Lezenn diazez un despugnerzh heol a zo an efed ti gwer. Ar skinoù a c'hell treuziñ ar werenn o deus betek 3 evel hirder gwagenn.

Ar skinoù-se tapet gant ar follenn du a ya da dommañ ar follenn hec'h-unan hag an dour neuze e vez adskinet ganti skinoù isruz, skinoù ne c'hellont treuziñ ar werenn. Chom a reont e-barzh ha 'benn ar fin e yeont da dommañ an dour.

- Despugnerzioù all :

- despugnerzh aer. E-lec'h tommañ an dour e vez tommet aer. Respont a ra fonnusoc'h evit an hini dourenn da lavarout eo eo a bouez-bras amañ e Breizh peogwir peurluviañ amañ e-pad ar goañv e par an heol etre div goumouenn. An despugnerzh aer a c'hell labourat memestra.

- despugnerzh gant diveradur dour. Lakaet e vez an dour da ziverañ war ar follenn du. Bez he deus an despugnerzh-se ur respont prim.

- Despugnerzh gant charreoù-gwrez. Evit kreskaat efedusted un despugnerzh e vez implijet charreoù-gwrez. Hervez


an derez gwrez labour e vez dibabet an dourenn a c'hell bezañ (helium, dour, amoniak, freon,..)

Ar wrez a lak an dourenn da zont da vezañ aezhenn e tu kleiz ar verrdresadenn An diforc'h gwask a lak an aezhenn da vont war an tu dehou, lec'h emañ yen .. Ar yenijenn-se a lak an aezhenn da c'hilzhenniñ. Neuze an dourenn, dre an danvez korzennet-moan, a ya en-dro e-barzh an tu kleiz. 'Benn ar fin, e vez lakaet ar wrez da vont deus an tu kleiz d'an tu dehou, da lavarout eo, e vez charreet gwrez hag an dra-se gant un efedusted mat-tre.




Survezhioù heol e-pad ur bloaz. Da skouer, Kemper : 1900.


LUC'HANNAD SKINEREZH AN HEOL



AN DIVERADUR DOUR



AN DESPUGNEREZ AER




III - IMPLIJOU ENERGIEZH AN HEOL

1 - An dommerez dour heolel

Evit ober un dommerez dour heolel e ranker kaout :

- un despugnerез plaen,
- ur baloñs evit lakaat an dour tomm.




Peurvuiñ e kaver div dro :

- an hini gentañ a dremen dre an despugnerез hag an eskemmerез e-barzh ar baloñs. Lakaet e vez e-barzh e plas an dour (a c'hellfe skornañ e-pad ar goañv) un dourenn glikolet. An dourenn domm o tont er-maez eus an despugnerез a ya e-barzh ar baloñs 'lec'h ma Taosk he gwrez d'an dour yen. Dre-se e ya en-dro yenaet e-barzh ar baloñs. An dourenn a vez lakaet da redek gant ur rihoul pe dre wrezsifoc'hell.

- an eil. An dour yen a zeu e-barzh ar baloñs 'lec'h ma vez tommet a-raok bezañ implijet.

Eveljust an energiezh ez eus moaien da bakañ e-pad ar goañv n'eo ket a-walc'h anezhi evit tommañ an dour. Neuze eo dav implij un eil dommerez a c'hell bezañ gant tredan, gaz, fuel, keuneud ... Ur gudenn a sav 'benn 'vez implijet skineroù tredan e-barzh ar baloñs e-unan. Ne vezont lakaet da vont ken e-pad an noz, da lavarout eo, lakaomp 'peus skarzhet ar baloñs e fin an devezh, an dour 'vo tommet gant an tredan e-pad an noz hag an deiz war-lerc'h ne vo ket 'voaien implij energiezh an heol (ma'z eus deuz-outi) abalamour ma vo re domm ar baloñs.

Un dra all zo c'hoazh, n'heller ket leuskel ar riboul da vont en-dro noz-deiz, yenaat a rafe ar baloñs e-pad an noz evel just. Neuze eo dav implij ur reizherez diforc'hel : lakaet 'vez ar riboul da vont hepken pa vez tommoc'h an dour a zeu er-maez deus an despugnerез evit hini ar baloñs.



IV - TIEZ HEOLEL

- Un doare all da sevel tiez. Boazioù an dud er mareoù-mañ a zo sevel tiez hep teurel kont ouzh an amzer lec'hel. Padal an doare hengounel d'ober oa studiañ pizh al lec'h, da lavarout eo :

- tiez gwaskedet lec'h 'vez avel en un doare ingal,
- tiez tuet ouzh ar c'hreisteiz evit pakañ ar muñañ posupl an heol dre ar prenistri,
- mogerioù ledan a-walc'h evit kaout na re yen e-pad ar goañv na re domm e-pad an hañv.


Evit an tiez heolel eo dres memes tra. An ti gwaskedet mat-tre a zeu da vezañ ur gwir despugnerез heol evit digreskiñ ar muñañ posupl an ezhormoù gwrez.

Bez' ez eus daou zoare da sevel anezho :


- 1 - Tiez heolel anvet disoberus - An aer (peurvuiñ tommet gant an heol) a dremen 'barzh an tiez en un doare naturel. Diazezet int war ar reolenn TROMBE-MICHEL. Penaos e ya en-dro ?

E-pad ar goañv, an abalañchoù 2 ha 3 zo serret. 1 zo digoret. Skinerezh,

An heol a sko gorre kreisteiz an ti graet gant ur voger ledan a-walc'h evit derc'hel ar wrez ha gant ur werenn. An aer o tremen etre ar voger hag ar werenn zo tommet etre a-raok mont en-dro e-barzh an ti. (Bez e c'hell ar sistem-se mont en-dro peogwir an aer domm a bign).




E-pad an hañv. An abalañchoù 2 ha 3 zo digoret. 1 zo serret. E-pad an hañv vez implijet ar voger "TROMBE" evit yenaat an ti. Bremañ eo implijet ar voger hag ar werenn evel ur siminal heolel. An aer fresk a ya e-barzh an ti dre an toull 3 hag a vez nevesaet abalamour d'ar siminal a lak anezhañ da vont er-maez dre an toull 2.



- 2 - Tiez heolel anvet oberius. Kavet e vez e-barzh an tiez-se 4 dra :
 - despugnerезioù heol gant dour pe aer,
 - ur pod bras a-walc'h evit derc'hel ar wrez despugnet gant an despugnerезioù,

- ur sistem evit adkemer ar wrez e-barzh ar pod,
- ur reizherez evit lakaat an holl draoù da vont.


Tiez gant despugnerzioù aer. Gwrez dalc'het e-barzh bili. An aer, war lerc'h a dremen e-barzh an despugnerzioù a ya da domañ bili pe brikennoù dindan an ti. Adkemeret gant un dro all ar wrez a ya da domañ an ti. Tiez e-giz-se a vez kavet bremañ e Breizh (An Oriant, Tregon...)



Redenn diarez. Tiez gant despugnerzioù aer.

Tiez gant despugnerzioù dour. Gwrez dalc'het e-barzh an dourenn dindan ar stumm kuzh pe santidik.

An dour war-lerc'h a dremen e-barzh an despugnerzioù a ya da domañ un dourenn (peurvuiñ dour) e-barzh ur pod bras dindan an ti. E-pad ar goañv e c'hell derez en dour mont






betek 30 - 35° C. Neuze evit dont a-benn da domañ an ti gant un derez izel e ranker implij plañchoù tommañ gant ur gorre eskemm bras a-walc'h. Lod 'zo a lavaro eo dañjerus met n'eo ket abalamour m'eo un dommerez a zerez gwrez izel. Un eil tommerez eo dav kaout pa ne bar ket an heol a-walc'h. Evit bezañ efedus e ranker kontañ war 1 m2 despugnerz evit 10 m3 tommet. Da lavarout eo evit un ti boutin war-dro 30 m2.

V - IMPLIJOU ALL



- Poazherez heolel, daou zoare zo d'ober anezho :

- ar boazherez dre aezhenn dour o implij despugnerzioù plaen gant div werenn, evit kaout un derez gwrez uheloc'h ouzhpenn e ranker studiañ pizh an harpadur gwrez.
- ar boazherez gant kreizennadur a skinerezh. Evit ober anezho e ranker implijout melezourioù paraboliek. An danveziou da boazhañ a zo lakaet e-barzh al luc'hkreizenn.


Berrtresadennoù o tiskouez an daou zoare d'ober poazherezioù dre greizennadur skinerezh an heol.




- Disalladur an dour mor. Aes-tre eo implij despugnerzioù plaen evit disallañ an dour mor. Amañ e lak ar wrez an dour da virvif. An aezhenn disallet a ya da c'hlizhenniñ war ar werenn yen. Diverañ 'ra ar glizh goude-se hag e traon an disallerez e vez kavet an dour dous. Dazont ar binvijiri-se vo sur a-walc'h mat-tre, n'int ket ker anezho hag ouzhpenn n'eo ket start ober anezho. Implijet e vezont e-barzh ar broioù tomm heoliet mat-tre, broioù a vank dour dous peurliesañ.



- Sec'herezioù heolel. Kement a energiezh a vez implijet evit sec'hañ frouezh al labour-dour ma talv ar boan lakaat an heol da dennañ an dour deus danveziou 'zo. Meur a unan a zo bet savet hervez ar verrtresadenn-mañ.




- Riboul heolel. Gant ar riboul-se e vez laketañ an heol da grouiñ energiezh mekanik. Alies-tre e-barzh ar broioù tomm e vez kavet dour dous dindan an dour. A-bouez-tre eo kaout binvijiri a seurt-se e-barzh ar broioù-se e lec'h ma vez diaes-tre kas gaz pe eoul-mañ. Gwelet vo war ar verrtresadenn penaos e ya en-dro. An droellrod dre aezhenn a servij evit pompañ dour.




- Ynerez heolel. Moaien a zo gant gwrez an heol yenaat o implij ur ynerez dre lonkadur. Gant ar memes despugnerzioù e vefe moaien yenaat e-pad an hafv ha tommañ e-pad ar goañv.

Un doare all a zo d'ober yenijenn o implij ar skinerezh. Memes e-kreiz an hafv e-pad an noz er Sac'hara e skorn. Yenaat a ra o skinoù war an difin. C'hoarvezout a ra alies e-pad ar goañv pa vez disheollet an amzer, klerañ a ra.



- Forn heolel Odeillo. O kreizennañ ar skinerezh e c'heller tizhout derezioù gwrez uhel-tre (etre 3.000 ha 4.000 derez). Gant derezioù ken uhel e vez graet studioù war an danvezioù dideuzus hag ouzhpenn ez eus moaien ober aezhenn dour hag evel just goude-se dre un droellirod aezhenn fardañ tredan (Rak-tres THEMIS 1 MW gant E.D.F.).



Andrev GOALIC

Geriadurig :

- Despugneraz = capteur
- Gwreznerzhoniezh = thermique
- Tredan = électricité
- Skinoù eun skign = rayonnement direct, difus.
- Unliv = monochromatique
- Gwelus = visible
- Follenn du dalc'hus = absorbeur

- Danvez harpañ gwrez = isolant
- Skinoù isruz = infra-rouge
- Amzer respont = temps de réponse
- Despugneraz diveradur dour = capteur à ruissellement
- Charr-gwrez = caloduc
- Aezhennet = évaporateur
- Glizher = condenseur
- Kelc'hennad kenderez = zone adiabatique
- Danvez dorzennet moan = capillaire
- Tro = circuit
- Gwrezsiforc'hell = thermosiphon
- Reizherez diforc'hell = régulation différentielle
- Disoberus = passive
- Luc'hannad = spectre

HOR YEZH

HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH
 HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH
 HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH
 HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH
 HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH SAVET E 1954
 GANT ARZEL EVEN. RENER : PER DENEZ
 KOUMANANT : 50 LUR DA Y;DESBORDES
 1, PLASENN CH. PEGUY - POUILLBRIANT
 29260 LESNEVEN. CCP 1499 51 ROAZHON

AL LIAMM

AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM
 AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM
 AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM
 AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM

LEVRIOU NEVEZ DEUT ER-MAEZ:
 KENAN KONGAR BARZHONIGOÙ 30 LUR
 MAOZ DEZ GLANDOUR IZATA 34 LUR
 R.A.R C'HALAN LEVR AR BLANEDENN 29 L
 A. DUVAL TRAON AN DOUR 36 LUR

AL LIAMM, 47 str. NOTRE-DAME,
 22200 GWENGAMP. CCP 1136 82 ROAZHON

LENNEGEZH

Ar "Bydham Act" a roas urzh d'al "Landlord" e 1903 da werzhañ e zouarod d'e gouerien ("Tenants") ma felle d'an tri c'hard anezho o frenañ. Hogen pinvidik a-walc'h d'hen ober d'ar mare-se en Iwerzhon ne oa nemet ar Gatoliked a zere uhelañ. Ur seurt emglev etre bourc'hizien, "judoled", an hini 'oa ha netra all. Gwelloc'h c'hoazh chom gant tud a renk uhel hag heñvel, daoust dezho kacout kredennoù relijiel disheñvel eget lezel an douar da vont gant ar re baourañ. Risklusañ tra evit ar galloud.

Kavet 'vez ar seurt emzalc'h war dachenn al lennegezh. Pa voe c'hoariet "The Playboy of Western World" e Dulenn (gant Remi Derrien eo bet lakaet e brezhoneg e 1977, "Lapous-den penn ar bed", en un doare souezhus a-walc'h), e voe ret da W.B. Yeats, d'ar poent-se rener an "Abbey Theatre", gervel ar polis saoz (!!!) da zont da sioulaat ar saliad tud kement a che a raent. Skrivagnerien evel D. Hyde, D. Cockery, hag all, ne oant ket evit gouzavf temz-spered ar pezh c'hoari rak hervezo : "Kunujennet 'oa ar bobl iwerzhonat ennañ".



Diaes 'oa neuze c'hoarzhif goap diouz traoù 'oa. Un tamm diwezhatoc'h ' savas reuz bras gant unan eus pezhioù c'hoari Sean O'Casey rak diskouezet 'oa ar banniel iwerzhonat war leurenn-c'hoari an "Abbey". Seurt traoù ne oant ket "dereat". Koulskoude danvez istor ar "playboy" a zivanas diouz istorioù pobl pe vojennoù bet klevet gant J.M. Synge ha dastumet gantañ en e levr "The Aran Islands", pa oa bet o taskif gouezeleg enno. Tabutoù taer, kunujennoù a bep seurt voe embannet e pep kazetenn. Thomas Kilroy en deus graet ul levrig ganto : "The Playboy Riots", Dulenn 1971. Nebeut anezho o tifenn ar pezh-c'hoari. Ur buruteller un tamm sederoc'h a skrivas memestra : "It is as if we looked ourselves into a mirror for the first time and we find ourselves hideous. We fear to face the thing". ("Evel ma sell-femp ouzomp hon-unan en ur melezour an hini eo, hag euzhus en em gavomp. Aon hon eus da vont a-benn ouzh an dra-se"). Ha petra 'ta c'hell bezañ en "dra-se" na pa vije ene ar bobl diwar ar maez hag ene ar bobl dre vras. En e levr diwar-benn Zapata, an emsaver Meksikan, e skriva Carlos Fuente na pegen spontet e voe bet ar gouerien veksikan pa weljont evit ar wech kentañ o dremm en ur melezour e ti o mestr, nevez aloubet ganto. En Iwerzhon ha dre vras e pep minorelezh o stourm evit he frankiz, emsav don he c'hevredigezh hag he lennegezh war un dro a zo heñvel-rik ouzh spered ar gouerien a Vro Veksik dirak o melezour : dizoloadenn souezhet o ene kollet. Iwerzhoniz n'o deus ket dizoloet o ene kollet en dispac'h met e-doug an dispac'h o deus adkavet anezhañ. Darn anezho da vihanañ.

E gwirionez, tabutoù ar "Playboy" a ziskouezet enebiezh vras daou demz-spered War un tu, ar vrogorourien a felle dezho implijout ar c'hoariva nevez krouet evit brudañ ar stourm broadel nemetken, evel n'o devoa graet gant ar G.A.A., ha war an tu all, ar re a soñje dezho e vije talvoudusoc'h stummañ c'hoarierien a-vicher, krouif ur c'hoariva iwerzhonat, modern, pinvidik, gouest da vezañ diskouezet ha brudet en estrenvro.

E melezour istorel ha lennegel Iwerzhon e vez kavet meur a wech skeud an ene hag hini ar marv kemmesket. Stourm evit un uhelvennad politikel war roud un huñvre bewech ampellaet betek ha dre ar marv a zo deus de c'hountin un nerzh nevez gant ar marv. T. Mc Swinney, maer Cork o vervel gant an diouer-

boued e dibenn 1920 a zegas soñj eus pacted an I.R.A. o vervel e hanternoz ar vro 60 vloaz goude. Connolly o vont d'an G.P.O. e 1916 gant e zaou c'hantad-ig bennak a gamaraded, da zevezh kentañ an emsavadeg e Dulenn a zisklerias : "Maomp o vont da vezañ friket !".

En e brezegenoù e c'houlenne P. Pearse 'vefe "santelaet" gwad an emsaverien Iwerzhonat.

Dismegañset bras ha nac'het zoken 'vez ar seurt emzalc'h e Bro-Saoz ha n'eo ket souezhus eveljust, met kerkoulz all 'vez graet gant renerien ar Republik dre ma teu an doare stourm-se da c'hounit nerzh e-touez ar bobl, un nerzh dafjerus evito. Ha koulskoude ur mor a dud en deus kaset Mac Swinney d'an douar. Ha koulskoude eo bet dilemmet B. Sands.

EMZALC'H AR RE C'HALLLOUDS

E kreiz ar brezel dieubidigezh (1920) e voe kaset ar "Black and Tans" (en abeg d'o quiskamant) d'an Iwerzhon, darn anezho soudarded "dilabour", an darn vuiañ anezho toullbac'hidi a bep seurt, paet dek shilling an devezh, hag an "Auxiliaries" anvet "Auxies" ofiserien yaouank paet ul lur sterling an devezh. Devezhourien ar marv. N'o devoa lezenn ebet d'o ren, ha buan-kenañ e teujont da vezañ "brudet" er vro a-bezh. Meneget 'vezont e kement levkr skrivet gant an emsaverien : "My Fight for Irish Freedom" gant Dan Breen, (lakaet e brezhoneg gant Ar Barzhig), levrioù diwar-benn Tom Barry, Sean Tracy, Collins, ... deut holl anezho da vezañ harozed ar c'hansouenn-ou poblek (Rebel Songs). Degaset 'oant bet da "flastrañ an emsavadeg" hervez titl ar gazetenn "Morning Post" d'ar mare-se.

Evit stourm a-enep ar feulster dall-se ne chome nemet tri doare : kenderc'hel gant ar feulster o c'houzout e vefe dibosubl lakaat ar Saozon da blegif, pegif gant an nann-feulster, pe ober gant an dacu gemmesket gant ur strollad politikel hag un arme kuzh.

Start e krede T. Mac Swinney en nann-feulster, levezonet ma oa bet gant doare ar Mahatma Gandhi sur a-walc'h. : "Ne vo ket an trec'h gant ar re a c'hell gloazañ ar vuiañ met gant ar re a c'hell gouzavf ar vuiañ".

Harzet, kondaonet ha sparlet e toullbac'h Brixton e Bro-Saoz e nac'has gwiriañ al lez-varn hag e pegas raktal gant e ziouer-boued. Mervel a reas 74 devezh goude d'ar 25 a viz Here 1920 daoust d'ar miliadoù a lizhiri kaset d'ar gouarnamant saoz, daoust da bouez ar Stadoù-Unanet. Brudet hag evezhiet bras 'voe stourm Mac Swinney en Iwerzhon a-bezh. E varv siwazh, a roas brud bras d'ar Sinn Fein war an dachenn bolitikel. 60 vloaz diwezhatoc'h 'voe adimplijet doare stourm an diouer-boued gant emsaverien an I.R.A. Sean O'Faolain, oberour "King of the Beggars" diwar-benn buhez O'Connell hag ar romantou "Bird Alone" "A nest of simple Folk" a gawe orin an diouer-boued en amzer gozh pa bege un "chieftain" bennak gantañ ken na vefe



Sean O'Faolain

bet baynet gant roue-meur ar vro abeg an tabut. Stourm dre an diouer-boued hervezañ a zo bet a-viskoazh un doare stourm hengounel implijet dalc'hat gant Iwerzhoniz. Efedus eo bet gant Iwerzhoniz kenetrezo cwechall gozh war a seblant. N'eo morse bet gwall efedus gant ar Saozon.

Marv Mac Swinney ha 60 vloaz goude marv 10 stourmer eus an I.R.A. e hanternoz ar vro a ziskouez splann pegen strizh ha sot eo chomet emzalc'h ha spered ar gouarnamantoù saoz, pe e vefe hini Lloyd George pe hini Thatcher. Kas ar "Black and Tans" pe an "Auxies" e 1920, pe kas ar "B. Specials" pe an "S.A.S" d'an Iwerzhon e 1970 n'en deus diskoulmet ha ne ziluzio morse ar gudenn Iwerzhonat. "Rule Britannia" a chom ar ger-stur e Bro-Saoz, "No surrender" en Hanternoz.

Hogen ur fazi bras 'vefe kredif eo Thatcher hag he gouarnamant nemetken o deus lezet B. Sands, Mc. Cresh, Hughes... da vreiñ e toullou-bac'h an Hanternoz. Ur c'hazetenner eus ar "Guardian" a skriva pegen spontet 'oa bet gant krizder ha feulster ar c'homzoù en doa bet tro da glevout en ur pub saoz goude marv B. Sands : "Mat-tre, unan nebutoc'h. An niverusañ ar gwellañ ... Lezel al loened brein-se da grevif ...".

Keit ha ma chom stourm an emsaverien war dachenn ar brezel nemetken ne vo ket re chalet ar Saozon. Met kerkent ha ma krog da c'hounit un efedusted politikel bennak, e vezont prest da lezel an diouerien-voued da vervel. "Wait and see" politikerezh al "Laissez-faire" ("lez da vont") ken doujet gant Trevelyan e-pad an naonegezh. Rebec'h ouzh renerien an I.R.A. eo a-enep kristen lezel o izili da vervel a zo kaer e-keñver mab-den, met didalvoud a-walc'h e-keñver ar stourm. An arguzennoù-se ar re zo bet implijet gant ar Saozon hag an iliz katolik evit terrif ar stourm. An hevelep tud n'o deus morse rebechet ouzh Padraig Pearse e c'houlennefe 'vefe santelaet gwad an emsaverien e 1916. Ha koulskoude : "kaer eo gwelout armoù e daouarn an Iwerzhoniz. Ret eo deomp dont da vozañ da soñj an armoù, ret eo deomp dont da vozañ da wel an armoù, ret eo deomp dont da vozañ da implij an armoù (...).

Skuilhañ gwad a zo kaer ha santel, hag ar vro a soñj dezhi eo spontus he deus kollet he denelezh ... Bez' ez eus kalz traoù spontusoc'h eget skuilhañ gwad, ha bezañ sklav 'zo unan anezho. "

Brezegenoù P. Pearse 'zo bet implijet gant Sean O'Casey en e bezh-c'hoari "The Plough and the Stars" deut da vezañ banniel ar broletourien. E-pad an eil arvest ez eus darn eus tud ar pezh-c'hoari o risañ bannec'hoù en ur pub, gant ar c'hast Rosie. Dre ar prenestr 'klever mouezh un den o prezegennif (komzoù Pearse int). Emañ an emsavadeg o kregif. Klevet 'vez ar vouezh ur wech c'hoazh. Emzalc'h an dud er pub :

- ar c'habiten Brennan (o sevel ar banniel) : "Bac'hidigezh evit frankiz Bro Iwerzhon !"

- al letenan Langan (o sevel ar banniel trili) : "Gloazioù evit frankiz Bro Iwerzhon !"

- Clitheroe : "Ar marv evit frankiz Bro-Iwerzhon !".

Fluther, eñ, a soñj dezhañ e vo gwelloc'h gant Rosie. Ar c'habiten Brennan a vo toullbac'h, al letenan Langan 'vo gloazet, Clitheroe, haroz ar pezh-c'hoari 'vo lazhet. Pezh o devoa goulenmet goude holl. Un tamm goapaù eo Sean O'Casey, kriz zoken, pa ziskouez en arvest diwezhañ gwreg Clitheroe, Nora, treif da foll pa vez kaset keloù ar marv dezhi, Bessie Burgess, ar brotestantez o vezañ lazhet dre fazi gant ar soudarded saoz pa glasse gwarezif Nora diouto. Ur mousc'hoarzh goapaù, trist ha tener. Dall eo ar feulster hag ar vuiañ kerseet 'vez ar re baour hag ar merc'hed.

Ar memes forc'hellegezh, ar fort'hellegezh etre ar stourm diabarzh hag an hini renet en diavaez a gaver el lennegezh, evel ma skriv Carlos Fuente : "E pep dispac'h e kaver stourm an dremmoù a-enep ar maskloù". Yeats, levezonet ma oa gant ar c'hoariva japanat 'zo bet an hini kentañ da implijout ar maskloù er c'hoariva e Dulenn. Implijet oant diwezhatoc'h gant Eugene O'Neill er Stadoù-Unanet ha gant Antonin Artaud e Bro-C'hall.



Eugene O'Neill

Hogen, er c'hoariva pe er romantou, an harozed a gaver el lennegezh iwerzhonat o deus an holl anezho ha don enno ur spered dispac'hel bennak, dalc'hmat sac'het etre daou vaskl : Christy Mahon, Red Hanrahan, Stephen Daeledus, Leopold Blum, pe harozed Sean O'Casey : Clitheroe Donal Davoren, Ayamonn a zo holl tud o klask o ene. "C'hoari ar maskloù". Carlos Fuente a c'houlennas ur wech digant ur peizant meksikan pe anv oa ur gêriadennig "Garduna pa vez peoc'h er vro, Zapata pa vez brezel" a respontas. Kement-mañ a gaver en Iwerzhon pa vez anvet Derry diouzh un tu ha Londonderry diouzh un tu all.

Forc'hellegezh c'hoazh gant skriva-gnerien an triwech'het ha naontekvet kantved. An darn vrasañ anezho (nemet ar re a skrive e gouezeleg eveljust) a skrive evit bezañ lennet, c'hoariet e Bro-Saoz, e Londrez. Trevadennet 'oant. Krouet eo bet ganto ar "stage Irishman" (hor Becassine deomp-ni), un Iwerzhonat mezvler, dalc'hmat prest d'en em gannañ, merc'hetaer, dizek ... Ar seurt den a blije kalz d'ar vourc'hizien saoz. Al leurren-c'hoari 'oa e Londrez, ar brud 'oa e Bro-Saoz.

C'hoari ar maskloù, c'hoari war an daou du, a zispleg emzalc'h ar "Free Staters" hag hini an iliz katolik e-pad ar brezel diabarzh : an aon. An holl 'oar eo bet fuzuilhet Connolly gant ar Saozon, azezet war ur gador ken gloazet ma oa. Fuzuilhet eo bet dre m'en doa kemeret perzh ha ma oa bet e penn an emsavadeg, met ivez dre ma oa sokialour dre m'en doa stummet, frammet hag urzhiet sindikadoù ar vicherourien ha roet un emskiant politikel nevez dezho. An aon diouzh un emsav sokialour taer nevez frammet en Iwerzhon hag he defe tizhet Breizh-Veur tamm-ha-tamm a lakaas ar Saozon d'e fuzuilhañ. Evit ar "Free State" e vije deut Connolly da vezañ arouez ar sokialouriezh, da lavarout eo, arouez an dizurzh'eneb relijiel, a-enep ar Stad nevez krouet gant skoazell ar Saozon.

Un enebour ramzel 'vije deut da vezañ eviti. Ur skouer all a zo hini Collins goude sinañ an emglev gant ar Saozon e Londrez e tisklerias : "I've signed my death warrant !" Na pegen gwir siwazh !.

Forc'hellegezh adarre gant emzalc'h politikel ar "Free State". Chom dindan krabanoù an drevadenourien e-lec'h

klask kaout an disamm diouto.

22 emsaver zo bet fuzuilhet gant ar soudarded saoz goude emsavadeg 1916, en o zouez breur Mac Donagh, ur skrivagner pezhioù-c'hoari yaouank hag a -zoare (brasañ fazi politikel ar Saozon d'ar poent-se). Soudarded ar "Free State" a fuzuilhas 70 republikan en un devezh (!!!) hag a daolas 3.000 anezho en toull.


EVIL LITERATURE COMMITTEE

Ken taer ha sot 'voe o emzalc'h war dachenn al lennegezh ha war hini ar yezh. Dont a reas a-benn da beurechuiñ al labour distruj damgrognet gant ar Saozon.

E penn ar Stad voe adkavet ar re aet da blantañ cheu en Abbey pa voe c'hoariet "The Playboy". Youc'het o devoa ivez e oa ur vezh c'hoari "The Countess Cathleen" ur pezh-c'hoari skrivet gant W.B. Yeats. Perak 'ta ? Peogwir 'oa-hi (enkorfadur Bro-Iwerzhon) prest da werzhañ he c'horf d'an diaoul evit ma vefe dieubet he bro hag he fobl diouzh gwask ar Saoz, ha spontusoc'h c'hoazh, peogwir e oa prest da reiñ an douaroù d'ar re baour. Eskob meur Iwerzhon a zisklerias 'oa ur vezh "The Playboy". Hogen pa voe goulennet perak digantañ, e respontas n'en doa ket lennet ar pezh-c'hoari !!!

E 1926 'voe krouet an "Evil Literature Committee". Pal an aozadur kristen-se oa skarzhañ ar skridoù "lous" diouzh ar vro venniget. Hogen e 1928, "The Irish Statesman" kazetenn lennegel wellañ Bro-Iwerzhon, krouet ha renet gant A.E. (Russell), 'voe "barnet" ha berzet war zigarez ma oa bet kavet en un niverenn bennak ul lizherig a netra a dage ur beleg bennak. E 1929 e teuas da vezañ ul lezenn : "Censorship of Publication Act". Kentañ levr da vezañ berzet 'voe hini Aldous Huxley "Point Counterpoint". Buan-tre neuze 'voe lakaet al lezenn da dalvezout evit skriva-gnerien all : Graham Greene, George Hemingway, Somerset Maugham, Arthur Koestler. Ha kemend-all evit ar skriva-gnerien iwerzhonat "lous" : George Bernard Shaw, Sean O'Casey, Oliver Gogarty, George Moore, Frank O'Connor, Samuel Beckett, Brendan Behan, John Mac Gahern hag eveljust, James Joyce, an hini lousañ. A dra-sur.

E 1965, tost da 10.000 levr voe berzet !!! Ar filmoù vez berzet eveljust pe droc'het ha didroc'het evel



DULENN HA SEAN O'CASEY TRESET GANT EILEEN COGHLAN

dellioù faou Pont Keryaou. Daou vloaz 'zo pa oan e Dulenn, 'm eus bet tro da vont da welout ur film. Gwechoù 'oa e teue ar film da vezañ digomprenus a-grenn. Distro da Vreizh, on aet da welout anezhañ e Roazhon. Sofjet 'm eus neuze : "Met petra an diaoul 'reont gant an troc'hadennoù e Dulenn ? ..." E 1958, pezh-c'hoari Sean O'Casey "The Drums of Father Ned" a lakaas an iliz katolik da simplif, da zihunif, da youc'hal, da vlejal ...

War dachenn ar c'hoariva : G. Fitzmaurice (aet da sot), Brendan Behan (aet da vezvier), Lennox Robinson, Campbell, G. Shields, Mac Namara, Carroll, ... War dachenn ar varzhoniezh : P. Kavanagh, Austin Clarke, a-bell an hini gwellañ d'am menoz (ret oa bet dezhañ sevel e di-moulañ evit embann e varzhonegoù), e hanternoz ar vro Denis Devlin, Louis MacNeice. War dachenn ar romantoù hag an danevelloù, Joyce, P. Colum, Behan, Beckett, O'Flaherty, O'Brien, O'Connor. an darn vrasañ anezho aet da repuif e Londrez, e Pariz, e New-York.



Edna O'Brien



Julia O'Faolain

Un dachenn lennegel nemetken a zeuas a-benn da greskiñ bravik-tre : ar c'hoariva. Perak ? Eeun-kenañ eo. Disofjet eo bet menegif ar c'hoariva war listenn an oberoù lennegel berzet. Ya. Disofjet Sur a-walc'h dre ma oa ken hir al listenn ken ne zeuent ket a-benn ken da gacut soñj.

Met pezh a felle d'an dud gwelout, pe marteze, pezh a felle d'ar galloud diskouez d'an dud, oa istor ar paour-kaezhig Iwerzhonad diwar ar maez o tont da Zulenn, pe ivez kudennoù an dud war ar maez. Mare an "Irish Provincialism" an hini oa. Padraig Kavanagh, daoust dezhañ sur a-walc'h, a zeuas da vezañ arouez an temz-spered-se. Adkavet 'voe neuze ar "Stage Irishman" a blije kement da dud Londrez da vare Dion Boucicault. Met echu da vat gant ar mezhvier, an Iwerzhonad dizesk, drouk, klasker chikan. Ur c'hatolik a-zoare oa bremañ, un tamm kollet er gêr vras met dous ha lentik-tout.

Ha koulskoude, skrivagnerien a-zoare oa da vezañ kavet en Iwerzhon d'ar mare-se.

Er bloavezhioù 55-60 e kemmas an traoù, dre ma oa pinvidikoc'h ar vro (echu "brezel an armerzh" etre Bro-Saoz ha De Valera). En-dro da Devlin ha Mac

Neice, e savas neuze barzhed yaouank hanternoz ar vro. Bevet o doa gant trouz an tarzhadennoù a-vihanik. Da gentañ John Montague, Seamus Heaney da c'houde, Derek Mahon, Michael Longley ha bremañ Paul Muldoon, Ormsby, Simmons, Kieran Carson, Seamus Deane ... Er Republik, en-dro da Thomas Kinsella ha Richard Murphy (ar skeudenn moulet e niverenn 16 Al Lanv n'eo ket hini Thomas Murphy ar skrivagner pezhioù-c'hoari met hini Richard Murphy ar barzh) war-lerc'h Austin Clarke 'teuas Pearse Hutchinson, Mikael Hartnett (a skribo e gouezeleg hiviziken), O'Driscoll.

War dachenn ar c'hoariva, Brian Friel, Thomas Murphy, Eugene Mac Cabe, ...

War dachenn ar romantoù Mary Lavin, Julia O'Faolain, Edna O'Brien, B. Kiely, J.P. Keane, J.P. Donleavy ...

Dre-se eo bet aesaet labour ar skrivagnerien en Iwerzhon a-bezh, hag er Republik dreist-holl dre ma n'o deus ket tailhoù da baeañ. Met "c'hoari ar maskloù" n'eo ket tost da echuiñ keit ha ma chomo kudenn an hanternoz da vezañ diluziet.



J.P. Donleavy, skrivagner brudet amerikan deut da vro Iwerzhon da chom.



Padraic Colum



Frank O'Connor

Savet eo bet ar studiadenn-mañ diwar-bech lennegezh Iwerzhon gant Harle Denas. Al lodenn gentañ a zo bet embannet war niverenn 16 Al Lanv

LABOUSED

AR BISIGLAOU (Parus major)

Gwechall p'am beze c'hoant da welet pennduiget e liorzha va zud ez aen betek stal ar c'higer tre 'kichen da gerc'hat druzoni. An tannoù druzoni e-pign un tamm fisel a veze staget ouzh ur skourr. Ur pennadig goude-se e veze gwelet un toullad bisiglaoued o pigosat an druzoni ha bec'h ganto, me lar' deoc'h ! O mouezhioù skiltra a gleven a-bell. Bez ez eo ar bisiglaou an hini brasañ eus ar pennduiget. N'eo ket gwall vras kouls-koude met anavezet e vez abalamour d'ar roudenn du o rannañ e daou e vruched melen. Peurvuiñ e vez gwelet e benn gantañ d'an traoñ, peg en ur skourr. Nijal a raio ken trumm all war-lerc'h ur fubuenn pe ur wespedenn. Gant gwir abeg e lavarer ez eo ar bisiglaou labous al liorzhoù. Ar girzhier hag ar bleuennou stank a blij dezhañ kement hag ar c'hoader. War-dro miz Genver e farden ur voestig koad hag enni e raen un toull evit ar bisiglaou da vont tre. Stagañ a raen ar voest en ur wezenn durc'haet d'an heol. Ar bisiglaou kustum da sevel e neizh e toullou ar gwez ne oa ket chalet d'ober e neizh en ur voest koad. Adalek penn kentañ miz Mae e ouien e oa viou em boest. Viou gwenn brizhellet a bikoù ruz-rouz. Seizh pe a-wechoù dek anezho ! Un dek devezh bennak goude e kleven an torad o viaoual er voest hag o zud a welen o vont hag o tont dizehan gant fubu pe preñved. Kerseet e vezen bep tro rak pa 'z aen da zigeriñ ar voest e kaven ar re vihan marv-mik. Moarvat ne zerec ket ma boestoù outo. N'int ket peurvuiñ laboused red ha n'eo ket ral gwelout anezho o nijal el liorzhoù e-pad ar goañv.



EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL
EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL
EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL-EUZHVIL

E ROAZHON EMAOC'H O CHOM ? NEUZE EO ARA
BAT DEOC'H C'HWITAN WAR WAGENNOU RADIO-
ROAZHON (91,5 Mhz) BEP MEURZH ETRE 9.00
EUR HA 10.00 EUR DEUS AN NOZ AN ABADENN
EUZHVIL E BREZHONEG PENN-DA-BENN. SAVET
EO AN ABADENN GANT GI-EDER FONTANELLA
HA LEONID ROSKO-POUDING. KELETER, FENT
HA MOUSFENT, POLITIKEREZH HA GARZHJOU.
SONEREZH DREIST. SELAOUIT EUZHVIL.....

TUDU

Anvioù all ar bisiglaou (Treger) :

- Marichalig (Goulien)
- Pennlaouig (Karaez)
- Pennduig (Langidig)

Implijet em eus "pennduiget" evit envel an urzh anvet paridae (mésanges). (Gw. studfadenn A. Gellig en AL LIAMM 170).



GERIOU KROAZ

1	2	3	4	5	6	7	8
I							
II							
III							
IV							
V							
VI							
VII							

1	2	3	4	5	6	
I	K	A	O	T	E	R
II	A	L	A	R		
III	M	A	N	E	T	
IV	A	N	E	V	A	L
V	M	I	D	A	S	
VI	B	G	D	E	N	
VII	R	M	O	N	A	
VIII	E	P	U	N	S	

- A-LED
- I. Baraerien.
 - II. Evel-se bezet graet. A lakao ar chas e fulor.
 - III. Tev mat. Pennou ton.
 - IV. Paotr fall.
 - V. Jani en hon lennegezh.
 - VI. Proviñsad Euskarek.
 - VII. Digeriñ a ra ar galon.

- A-ZERC'H
1. Leur a-wechoù.
 2. Eus moarvat. Div c'hoar.
 3. Tomm-tre. Bezañ da zont kemmet.
 4. Reiñ startijenn.
 5. Uman war bep linenn amañ.
 6. Div c'hoar. Rann a-dreuz.
 7. Sebezañ.
 8. Brudet eo he buhez. Pennou deut.

DISKLERIADUR

ENGANN, Emsav evit Dieubidigezh Vroadel Pobl Vreizh hag ar Sokialouriezh Emveret, a sav a-enep krouidigezh "Radio Bretagne-Ouest" e Kemper. ENGANN a zegas da soñj e tiwan ar radio-se a-ziwar ur c'hoant politikel, hini ar galloud jiskardian kozh, a venne adtapout krog er media en ur "rannvro" e riskl da c'hounit muioc'h a frankiz gant krouidigezh un niver brasik a-walc'h a skingvaou lec'hel. Mezout a ra ENGANN ne vez ket rannet Breizh e div lodenn ken met e teir (F.R.3 Roazhon F.R.3 Bro al Liger) ha ne c'heller ket selao an abadennoù brezhoneg e Breizh-Uhel ken. War ar c'hraf-mañ ha muioc'h c'hoazh war doareoù divyezhek R.B.O. emañ ENGANN etre daou venoz.


Sevel a ra ENGANN a-enep ar P.S., graet un "hanter-dro" gantañ, pa lare gant an Talbenn Sevenadurel Araokour e felle dezhañ sevel ur servij "radio-tele emren, lies, demokratel war ar pemp departamant".

Gant se ez embannomp sklaer adarre ez enebomp ouzh ur seurt parizian e Breizh. Goulenn a reomp ma vo savet ur "Radio Breizh" en un doare demokratel, o skignañ er pemp departamant hag o toujañ personelezh liesdoare Breizh hep e rannañ a dammoù, hag o reiñ an tu d'ar vrezhonegerien divroet da selao an abadennoù brezhoneg.

En tu hont da Gemper ha Roazhon e c'hellfe "Radio Breizh" gant skingvaou all. Kemer a rafe harp war ar radiooù lec'hel a zo dija. Dre se e vefe anza- vet d'ar re-mañ ur roll foran. Sikouret e vefent war dachenn an arc'hant hag ar teknik.

BREIZH DIEUB HA SOKIALOUR !
SEKRETOURIEZH VROADEL D'AN AFERIOU DIAVAEZ

M. SALMON





HEÏ! TUDOÛ
KEIZH! GWISKIT
AR RUMMAD
LUNEDOÛ-MANÑ HAG
E WELFOC'H UR
BED NEVEZ O
TIWAN...
ITRON.. TOSTAIT!!



O! GWELOUT
A RAN
NAONED E
BREIZH!!



LENNET
MOARVAT
LEVR BBT
SKRIVET E
ABAOE 50
ULOAZ! AR SKLIS-
SKLAS!!

NE WELAN NETRA WAR
AN TELE... MET WAR AR
RADIO E KLEVAN
BREZHONEG.... NEMETKEN



GWELOUT A RAN UN DAZONT
DISPAR 'UIT AR BRIKO... AR
BREZHONEG!!...

50 Lur
e
rousto
deoc'h!



A! A! DIGREDUS
DIOUZH UN TU E
WELAN SKRIVET
"ROAZON" HADIOUZH
AN TU ALL "ROAZHON"
AA! DISPAR! BEC'H
DAR SKRITURIOÛ!

PEBEZH
FENT!



GAST! BREMANÑ
E WELAN SPLANN
ENEZ EUSA!!!



GWISKIT LUNEDOÛ
GWENN HA DU E-GIZ HOLL
PUNKED HA PUNKEZED
AN EMSAV!....

RE!
WIR!

GANT AL
LUNEDOÛ-MANÑ
E C'HELLAN LENN
AL LANY 3 gwech
diorzh-RENK HEP
C'HOARZHIN!